


# **EMSAV**

GEÑVER 1967

NIV. 1



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 1 - Genver 1967

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F  
Deraouiñ a ra ar c'houmanantoù e miz Genver.

EMSAV  
30, Place des Lices, 35 - Rennes

C.C.P. RENNES 2 460 10

---

Pennskrivagner : Youenn OLIER

---

T a o l e n n

Perak "EMSAV" ? .....	p. 5
Al luskadoù politikel e Breizh e diwezh 1966 .	p. 6
Stourm Ar Chalotez .....	p. 10
Hengoun hon Emsav .....	p. 18
Notennoù armerzhel .....	p. 19

## P E R A K      E M S A V      ?

Deuet eo poent lakaat da dalvezout ar stur-  
*maximez, devise!* iennoù a zo bet <sup>etablis</sup> diazezet gant an Emsav, dreist-holl  
 abaoe ar brezel diwezhañ. Aet eo an Emsav dreist da  
 ziv bazenn a ranked tizhout a-barzh kregiñ gant ur  
 pennad hent nevez. Da gentañ eo bet unvanet ar yezh.  
 D'an eil, treset eo an hent a gas d'ar pal nesañ a  
 rank Breizh <sup>attendre</sup> diraez koustet a gousto : ar Stad Vrezhon.

Ar gelaouenn-mañ zo enta hini al labourerion  
 o deus <sup>commence</sup> staget a-zevri da sevel ar Stad Vrezhon. Ur  
 gelaouenn bolitikel eo, ha war un dro ar benveg da  
 stummañ ar re a sammo ar c'hargoù ponner a fizio enno  
 pobl Vreizh war hent hec'h adsav.

*relèvement  
reconstruction*



## AL LUSKADOU POLITIKEL E BREIZH E DIWEZH 1966

Abaoe diwezh an eil brezel bed ez eo <sup>fañter etommant</sup> gwan eston al luskadoù politikel e Breizh. Strollad politikel brezhon ebet n'eo deuet a-benn da ziazezañ ur gelennadurezh na da <sup>mener</sup> ren un ober <sup>efedus</sup> efedus. Evit ar strolladoù gall, ez eont <sup>forlomanet</sup> en-dro e-kreiz <sup>indiferent</sup> digasted ar boblañs ha n'o deus pouez ebet war emdroadur buhez ar vro. Kement diviz a-bouez o tennañ d'an armerzh, d'ar gevredigezh pe d'ar politikerezh-Stad a vez <sup>stimeret</sup> diferet e Paris. Ne chom gant Breizhiz nemet plegañ d'ober.

Evit meur a abeg evelato ez eo gwellaet kalz an emgav politikel abaoe un nebeut bloavezhioù. Ar boblañs dre vras a oar bremañ emañ ar vro en argoll. Trouz ar sindikadoù kouerion ha micherourion, difreterezh ar C.E.L.I.B., an taolioù-fourgas c'hoarvezet en hogos holl gêrioù Breizh a ziskouez emañ <sup>an</sup> dud e pep lec'h o verzhout grev-usted an enkadenn vrezhon. Studiadennoù PHILIPPONNEAU hag ar C.E.L.I.B. o deus lakaet sifroù war an enkadenn, ha sklaer eo : mar dalc'h da vont an emdroadur armerzhel a-vremañ, ez eo barnet Breizh da vezañ didudet a-grenn ha n'eo ket divroadelet hepken. Daoust ma vir al <sup>empirel</sup> levierezh gall na ve brudet ar studiennoù-se, ez int tamm ha tamm anavezet hag e kresk o levezon war ar boblañs. Evit ar <sup>empirel</sup> weñh kentañ en o istor kempredel e nac'h ar Vrezhoned <sup>empirel</sup> divroañ.

Fazi e ve avat krediñ emañ Breizhiz <sup>en etab</sup> e par an emsevel. Ar sindikadoù, ar C.E.L.I.B. ned eont ket pelloc'h eget gwelout en enkadenn Vreizh diaesterioù armerzhel ha kevredigezhel; emaint c'hoazh o krediñ e vo a-walc'h gant un taol kempenn a-berzh gouarnamant Paris evit lakaat an traoù war o zu mat en-dro. Dibaot kenañ eo c'hoazh ar

Vrezhoned a wel er gudenn vrezhon <sup>autu chorcque</sup> estreget ur gudenn armerzhel rik, da vezañ diskoulmet hep direnkañ un disterañ ar framm politikel a zalc'h o bro. Rouez eus ar rouesañ ar re a veiz Breizh evel un nerzh politikel a-dal d'an nerzh politikel all diazezet e Paris, hag a ziawel ar c'hrogad etrezo. Mar lakaer eo kantkementet dindan ugent vloaz niver an dud prederiet gant kudennoù Breizh, sur eo n'eus ket ouzhpenn unan diwar mil oc'h ober eus ar c'hudennoù-se kudennoù politikel. An 999 all zo c'hoazh o patouilhañ er geun armerzhelour (1).

Kefridi gentañ an emsav zo enta diskouez kudennoù Breizh gant o liv gwirion, da lavarout eo al liv politikel; reiñ d'ar bobl vrezhon un anaoudegezh reizh anezhi hec'h-unan, eus he gwirioù istorel ha politikel, eus he dleadoù istorel ha politikel. Preder bras ar gouarnamant gall e Breizh abace daou c'hant vloaz zo bet dibolitikaat buhez ar vro, mougañ kement nerzh politikel, dizarmañ kement danvez galloud gouest da gevezañ ouzh ar galloud gall. Al luskadoù armerzhelour zo, na mui na maes, al luskadoù en deus ezhomm ar gouarnamant gall : dibolitikel e fell dezho menel, sunañ a reont nerzhoù a c'hallfe mont a-hend-all d'ober luskadoù politikel, hag ouzhpenn-se e strivont da zerc'hel en e blom armerzh ur "rannvro" talvoudus d'an armerzh gall. Dlead kentañ an emsav zo enta politikaat holl gudennoù ar vro; enebañ gant nerzh ouzh kement luskad a glask <sup>garden</sup> mirout pobl Vreizh e-barzh <sup>concerne</sup> mougev <sup>l'omniel</sup> ar morvitellerezh politikel.

Pelec'h emañ al luskadoù-se a zalc'h ar Vrezhoned e-maez a bep politikerezh ? Ar re <sup>ruinables</sup> noazusañ, kresket evel <sup>champignons</sup> kebell-touseg <sup>puants</sup> flaerius war leur ar vougev, zo hep mar ar strolladoù Brezhoned bodet dindan ur skritell vrezhon ha n'int ket bet gouest goude ugent vloaz da del...enañ ur gelennadurezh, da sevel ur program na da ren

un obererezh a nep seurt; o mennadoù armerzhel ha kev-  
 redigezhel koumoulek, dezho dasonioù politikel dibal,  
 zo deuet a-benn da douellañ un darn eus yaouankiz ar vro,  
 a yae dezho "peogwir ne oa netra a-hend-all"; ha pe <sup>o beg</sup>  
 hepken d'an diheñcherezh-se <sup>détournement du chemin; égarement</sup> e rankomp o diskouez evel  
 noazus. Ken noazus-all eo ar c'hostezennoù gall a zeu  
 da <sup>recruter</sup> duta e Breizh evel ma tutaent en Algeria betek ma  
 voent skubet gant an dispac'h. Klask a reont tennañ o  
 mad eus <sup>idée</sup> enkadenn Vreizh er mare-mañ ha se e sell d'ur  
 politikerezh a-enep de GAULLE hepmuiken. An tu dehou  
 gall a ra van da grediñ en ur rannvroelouriezh eus a-  
 raok 1789. Ar gomunourion c'hall a glask <sup>cyfnewid</sup> kenkizañ ha  
 heñchañ al luskadoù distumm a zo o tiwanañ e Breizh.  
 Tra heverk, e hañval ar gomunourion c'hall doujañ al  
 luskadoù armerzhelour brezhon; pellaat a reont, dre  
<sup>de force</sup> heg, bruderion ar M.O.B. diouzh an displegadegoù sind-  
 ikadel aozet a-benn embann klemmoù ar Vrezhoned : kement-  
 se zo bet gwiriet e Gwengamp warlene ha nevez'zo e  
 Roazhon. Bep tro e reont faskourion eus izili ar M.O.B.  
 ha zoken eus izili an U.D.B. C'hoarzhus eo seurt tamall,  
 pa ouezer pebezh <sup>manque</sup> dienez a vennoziou, faskour pe all, a  
 gaver er M.O.B., pa ouezer ivez e klask an U.D.B. bale  
 dorn-uzh-dorn gant strolladoù gall an tu kleiz. An  
<sup>attitude</sup> emzalc'h-se <sup>de la part</sup> a-berzh ar gomunourion c'hall zo arduezius-  
 kenan eus an doare ma veizont Breizh. Talvezout a ra ar  
 boan da vezañ notet, rak eus an holl luskadoù o treuziñ  
 ar vro ez eo ar gomunourion a'n em gavo un deiz <sup>en face</sup> a-dal  
 d'an emsav brezhon. Lu eo soñjal e c'hallfe ar Strollad  
 Komunour Gall bezañ gounezet da geal ar Stad Vrezhon;  
 mat e vo lakaat ar gomunourion vrezhon da <sup>mediter</sup> brederian war  
 an istor, istor o bro, istor o strollad, istor o stroll-  
 ad e-pad Dispac'h Algeria pergen, evit ma c'hallint ober  
 an dibaboù ret kent na vo re ziwezhat evito.

Stad politikel Breizh e diwezh 1966 a c'hell



enta bezañ termenet evel-henn : ur boblañs dibolitikaet en he fezh war-bouez un nebeudig; ar sternioù gall, dornadig tud dipabet aketus, ar re a zalc'h ar vro e gwirionez, tudennoù divzremm, gourfolitikaet kostez Frañs, dibolitikel evit ur gwel kostez Breizh; un dornadig Brezhoned o tifretañ en un armerzhelouriezh dic'halloud, pe vodet er strolladoù politikel gall hag o ren enno ur marmouzerezh politikel hep muiken, o vezañ ma talvez o labour er strolladoù-se da ziraez palioù n'o deus netra da welout gant Breizh. An emsav en diwezh, bihan \* e niver, a zo gantañ holl c'hoanag pobl Vreizh; an emsav a zo e gefridi politikaat pobl Vreizh, reiñ dezhi ar c'hoant da ren he buhez-pobl evel m'he deus ar gwir hag an dlead d'henn ober.

---

(1) Armerzhelour eo an hini na oar gwelout kudennoù ar vro nemet evel kudennoù armerzhel.

## STOURM AR CHALOTEZ

Daou c'hant vloaz 'zo, al lun 29 kerzu 1766, e tistage an dug d'Aiguillon ur brezegenn hir a-walc'h dirak Stadoù Breizh bodet e sal vras ar Gordellidi e Roazhon. Dremmoù ar Vrezhoned a oa ouzh e selaou a chomas evelato yen ha difiñv <sup>totalément</sup> a-grenn. An aotrou de Robien, Merour ar Stadoù, en enep, a dennas ouzh e du asant an holl, pa <sup>fit allusion</sup> zamvenegas en e respont <sup>caractère</sup> temz-spered Breizhiz ha diaesterioù ar vro. Adalek an deiz war-lerc'h avat e krogas er Stadoù un emgann <sup>violente</sup> taer, pennek, <sup>enflammée</sup> entanet gant an holl zroukrañsoù a oa o c'hoiñ abaoe pellamzer.

Tremenet e oa daou vloaz abaoe m'en doa an dug d'Aiguillon klozet Stadoù Breizh e 1765. Ha pebezh darvoudoù <sup>événements embrouillés</sup> rouestlet e-pad an daou vloavezh-se! Ar vro a oa war var d'en em sevel, gant Breujoù Breizh <sup>détruit</sup> dispennet, ar barnerezh <sup>justice</sup> goursezet, ar brokulored-veur lakaet klask warno, un niver bras a Vrezhoned en toull-bac'h pe harluet. E-touez an harluidi e oa Ar Chalotez e-unan, dalc'h-et evit ar mare e Saintes, nepell diouzh Bordeaux, goude ur prosez politikel heuliet gant Europa a-bezh. Koulskoude ne oa aze nemet unan eus an emgannoù renet gant Breizhiz ouzh galloud Bro-C'hall a-hed an tri c'hantved ma padas Breizh <sup>autonome</sup> emren.

Evit kompren an darvoudoù-se eo mat kounaat <sup>se rappeler</sup> emgav ar vro er mare-se : abaoe he stagidigezh ouzh Bro-C'hall e oa enket Breizh en un <sup>accélé</sup> degouezh digempouz a-grenn. <sup>événements</sup> Diouzh un tu ur vro vihan ha pinvidik, gant Stadoù a <sup>déterminaient</sup> zivize e kendalc'hioù <sup>composés</sup> reoliek kement tra a selle ouzh <sup>classes sociales</sup> kenvad holl renkadoù ar vroad, hervez ul <sup>legislation</sup> lezennadur anvet "Ar C'hustum Kozh-Meurbet". Kement hini a oa e karg e Breizh a oa dalc'het gant al lezennoù-se, an duged da gentañ. Diouzh un tu all ur vro vras <sup>lois</sup> broudet gant he <sup>esprit</sup> spered brezelgar o kreskiñ. Galloud ar Roue er vro-se a



absolute tolérait bond (limit) obstacle  
 oa diharz ha ne c'houzañve na bevenn na dizarbenn ebet  
 e nep keñver. Ne oa rediet zoken da zegemerout nep  
 observations contérent, obligé de recevoir aucune  
 observations introduites  
 koufonet ma veze an arc'hant er gouelioù pe e brezelioù  
 administration  
 drastus. Pep tra er veradurezh a oa tro-ha-tro diouzh  
 "plijadur vat" pe gounnar ar Roue. Ar gouarnamant gall  
 en doa ezhomm da gemer arc'hant e-lec'h ma oa. E bal a  
 (halloueriez) d'arrondir tant qu'il  
 voe neuze krennañ par ma c'hellas war wirioù hag ens-  
 institutions bases  
 avadurioù Breizh. Diazezoù ar vroad-mañ, ha zoken Feur-  
Englev 1532 a oa evit tud ar Roue dreistgwirioù. Ar  
 Vrezhoned a responte evel-just e oant gwirioù-diazez  
 na c'hell ket ur vro o nac'h. Hogen, diskaret e oa bet  
 an nerzh broadel abaoe gwallzisoc'h Sant-Albin-an-Hil-  
 iber. Ne c'helle ken ar Vrezhoned enebañ ouzh c'hoantoù  
 (saut) (lavor) nemet mouezh ar gwir pe ar gwirioù. E-  
 pad tri c'hantved eta o deus renet Stadoù Breizh un em-  
 gann lezennel pennek, o tifenn kammed goude kammed  
 gwirioù ar vro, oc'h adkemer bep tro ma kavent tu ar  
 pezh a veze tennet diganto dre nerzh. Stourm Ar Chalotez  
 hag ar Breujoù a zeue warlerc'h emsavadegoù a bep seurt:  
Ar Re-Unanet, Ar Bonedoù Ruz hag An Unvaniezh evit Dif-  
enn Frankiz Breizh ar re vrudetañ anezho. +

hostility  
 An enebiezh etre Ar Chalotez hag an dug  
 d'Aiguillon, pell diouzh bezañ un enebiezh personel  
 hepken, evel ma 'z eus bet klasket diskouez a-wechoù,  
 a oa dreist holl un eneberezh politikel awenet gant  
 opposition impuissance  
 daou zoare disheñvel da welout ar c'hudennoù. Pa zeg-  
 ouezhas an dug d'Aiguillon e Breizh e 1753 e voe deg-  
 emeret gant kalz a zoujañs ha buan e c'hounezhas grad-  
 vat an dud. Pa guitaas ar vro avat, e 1768; e voe dindan  
 reconnaissance gratitude  
 droukrañs ha kasoni an holl Vrezhoned. An 21 a viz Du  
 1763 e voe embannet e Bro-C'hall un Diskleriadur Roueel  
 evit klask koazhañ dle ar Stad. An diskleriadur-se a  
 dénonciation  
 voe marilhet ha degemeret mat a-walc'h gant parlamantoù

rannvroel Bro-C'hall. En aner avat e klaskas ministr  
 Bro-C'hall, Choiseul, lakaat <sup>enregistrer</sup> marilhañ an diskleriadur  
 gant Breujoù Breizh. Goude tabutoù niverus en em gaver  
 e Mezheven 1764 hag an taosoù nevez n'int ket degemeret  
 muioc'h a-se gant ar Vrezhoned. Ar 16 Mezheven 1764 ez  
 eo galvet <sup>président</sup> kadoriad ar Breujoù, tri c'huzulier hag ar  
 prokolor-meur <sup>sur</sup> davet ar Roue e Versailles "evit klevout  
 pezh a <sup>dignité</sup> deurvezo ar Roue reiñ dezho da c'houzout a-zivout  
 Diskleriadur an 21 Du 1763 hag e <sup>enregistrement</sup> varilhadur". An 9 Gouere  
 e voent degemeret da gentañ gant kargidi uhel evit klev-  
 out komzoù trenk a-walc'h. War-dro kreisteiz e teurvez-  
 as ar Roue o gwelout kent mont da chaseal. Goude bezañ  
 gourc'hemennet dezho marilhañ e ziskleriadur eus an 21  
 Du tremenet en em droas etrezek Ar Chalotez evit e  
 c'hourdrouz <sup>menacer</sup> dichek : "En em renit gant muioc'h a boell,  
 me henn lavar deoc'h, pe e vo <sup>ou</sup> kerse <sup>vous</sup> ganeoc'h!" Ar Vrezh-  
 oned ne oant ket boas ouzh seurt lavaroù. Darn eus ar  
 gannaded a voe glac'haret, darn all a voe fuloret, met  
 Breujoù Breizh goude klevout o danevelloù na blegjont e  
 nep keñver. Holl izili ar Breujoù a 'n em savas adal  
 neuze a-enep d'an dug d'Aiguillon hag an 26 Eost e teg-  
 emeras Loeiz XV ur bodad <sup>groupe</sup> kefrediet <sup>change</sup> nevez diouzh o ferzh.  
 Dileuridi ar Breujoù a zisplegas war o hed <sup>de en fait des parlementaires</sup> dirak ar Roue  
 an holl damalloù graet enep mererezh ar C'homandant e  
 Breizh.

An diaesterioù a badas evel-se betek miz here.  
 Tamm ha tamm e teuas Stadoù Breizh ivez da gemer savboent  
 ar Breujoù ken e tamallas an dug d'Aiguillon da Ar Chal-  
 otez bezañ <sup>imaginer</sup> itriket un emglev enep dezhañ. An deiz kentañ  
 a viz here 1764 e tigure Kendalc'h Stadoù Breizh e Naoned.  
 Daoust da holl c'hourdrouzoù komiserion ar Roue e padas  
 ar Stadoù-se c'hwec'h miz hep na voe tu d'en em glevout,  
 daoust d'ar prof' a <sup>cadeau d'honneur</sup> 700 000 lur votet an 22 C'hwevrer 1765.  
 Derc'hent klozidigezh ar Stadoù, an 31 Meurzh, e roas an

dug d'Aiguillon dezho da anavezout un urzh a-berzh ar Roue <sup>au sujet</sup> e-ser an tailhoù da rastellat e Breizh. Klozet e voe ar Stadoù ar 1añ Ebrel 1765 goude bezañ lakaet sin-<sup>mémorandum</sup>añ ur wech ouzhpenn a-gevret gant kefrediaded gouarnam-ant ar Roue ne vefe savet tailh ebet e Breizh hep asant ha kontrollerezh ar Stadoù.

Setu penaos e teue Breizh a-benn da wareziñ <sup>protéger</sup> hec'h armerzh ha da ziwall he foblañs diouzh an taosoù re huel a gouezhe war rannvroioù Bro-C'hall. Tamm ha tamm e komprenas an dug d'Aiguillon ivez ne vefe tu ebet da ren Breizh evel rannvroioù Bro-C'hall anez dis-  
kar ar Breujoù ha da gentañ ar prokolor-meur, Ar Chalotez e-unan. Adalek derou miz Du 1765 e oa e-leizh a soudard-  
ed tro-dro da Roazhon. Den evit gwir ne ouie resis perak, met e-kreiz an nozvezh eus an 10 d'an 11 Du e voe kom-  
prenet : da un eur diouzh ar beure e voe gronnet gant <sup>entrepris, armées</sup> dragoned <sup>maisons et habitations</sup> tiez-anez ar brokulored-veur ha tri c'huzulier eus Breujoù Breizh. Buan e lammas ar soudarded en tiez, gant o baionetez war o fuzulhoù. Ar Chalotez a zo dihunet trumm ha gourc'hemennet dezhañ mont da heul ar soudarded. Nac'het eo outañ skrivañ; goulenn a ra gwel-  
out an urzhioù-herzel, pe gouzout an abegoù : pep goulenn zo nac'het. Sammet eo neuze Ar Chalotez gant ar soudarded hep bezañ gallet lavarout zoken kenavo d'e wreg pe d'e vugale. Daou noter roueel a zegouezh raktal evit studiañ ar paperoù ha lakaat ar <sup>debris</sup> silloù war an arreb-  
euri hag an dorioù. E ti pennañ difennourion ar gwir e Breizh e c'hoarvez damheñvel en noz-se. Diouzhtu eo kas-  
et Ar Chalotez etrezek Montroulez, hep gellout diskuizhañ e nep lec'h. Ac'hane eo kaset gant ur vag teir lev er mor, e kastell an Tarv. Kriz-kenan e vo ar vac'hidigezh er c'hreñvlec'h-se en abeg d'ar savadur moarvat, met c'hoazh dre <sup>rudesse</sup> rustoni gouarnour an toull-bac'h e-unan. N'hellomp ket heuliañ holl drubulhoù Ar Chalotez : <sup>magnifiques</sup>



a-walc'h eo gouzout ne voe <sup>change</sup>espernet <sup>harshition</sup>heskin ebet dezhañ a-hed mizioù hir ma chomas e kastell an Tarv ha goude e Sant-Malo.

Ur wech dibennet ar stourm e Breizh e klaskas an dug d'Aiguillon adkempenn ar Breujoù en ur virout hepken an dud a lezenn sentusoc'h outañ eget ouzh gwirioù Breizh. Met ne oa ket a-walc'h. Digoret e voe e Genver 1766 ur prosez hir ha luziet evit klask diskar brud vat ar prokolor-meur. Ur prosez leun a zarvoudoù souezhus, gant danevell-<sup>teste</sup>skridoù dizanv <sup>refandus</sup>skignet a bep tu, aferioù polis kuzh gant barbouzed an amzer, tamalloù diwir, enklaskoù ha gourdrozoù a bep seurt a-berzh <sup>fonctionnaires</sup>kar-gidi ar Roue e Breizh. Ken diaes e voe d'ar re-mañ en em dennañ diouzh an afer ma <sup>dissolve</sup>tivodas a-benn ar fin Loeiz XV al lezvarn <sup>tribunal</sup>a-ziforc'h <sup>special</sup>: difennet a-grenn e voe komz hiroc'h diwar-benn an aferioù-se, hag ar Chalotez a voe kaset d'an harlu betek Saintes e-kichen Bordeaux.

Ar Stadoù a zigoras an 29 Kerzu 1766 a voe e-touez ar re drubuilhusañ e istor Breizh. Padout a rejont betek miz Mae 1767 hep ne teuas a-benn an dug d'Aiguillon da <sup>contingente</sup>rediañ ar Vrezhoned da votiñ pezh a c'houlenne. Nac'h a rejont pep tra keit na vefe ket roet tu dezho da c'hervel da zic'haou dirak ar Roue e-unan ha prometet distro ar Breujoù da Roazhon.

Un deiz e teuas tro an dug d'Aiguillon da goll grad vat Choiseul. Ar 17 Meurzh 1770 e kollas e garg a Gomandant e Breizh ha raktal e voe digoret ivez ur prosez enep dezhañ. Goude bloavezhioù hir e c'hellias prosez Ar Chalotez bezañ adwelet. Didammalet a-grenn a voe prokolor-meur Breizh ha roet ar frankiz dezhañ. Distreiñ a reas evit kemer un nebeut diskuizh betek kastell Keranrouz a-us da ster Montroulez. Dirak ar c'hastell-se e oa trem-

enet dek vloaz bennak en araoek er vag hen kase etrezek e doull-bac'h kentañ e kastell an Tarv. <sup>triolet</sup> Dambrest goude e voe adroet e garg da Ar Chalotez hag ar meurzh 13 Kerzu 1774, da 7 eur abardaez e voe degemeret e kêr Roazhon. Un degemer <sup>mervilleur</sup> marzhus a-berzh un <sup>faute</sup> engroez diniver a Roazhoniz. Ouzhpenn daou c'hant studier war ar gwir a gerzhe dirazañ war varc'h. Daou warn-ugent karroñs ha daouzek prokulor-meur hen <sup>erwitant</sup> ambrouge. Ar c'hanolioù a denne, an tancioù-artifis a darzhe a bep tu; er straedoù sklerijennet ha war ar plasennoù e korollas an dud a-hed an noz ha zoken diwezhat an deiz war-lerc'h. Degouezhet el lezvarn e tistagas Ar Chalotez komzoù a beoc'h hag a unvaniezh evit an holl, o c'hervel pep hini da adkemer e labour evit mad ar vro.

Hogen ar Breujoù a oa bet "dizenoret dirak Europa a-bezh" evel ma lavarent. Ar 15 Kerzu avat e voe degemeret d'o zro an holl lezvarnourion harluet a-gevret gant Ar Chalotez hag adlakaet en o c'hargoù <sup>d'avant</sup> a-ziagent.

Setu un <sup>abrigé</sup> diverrañ eus ar stourm renet gant Ar Chalotez ha Breujoù Breizh ouzh <sup>offension</sup> mac'homerezh Bro-C'hall. Mat eo bremañ <sup>mener a ben</sup> disoc'hañ d'un nebeut evezhiadennoù war an afer <sup>trouble</sup> trubuilhus-se.

Da gentañ e <sup>gand, an leue</sup> vir **Stourm** Ar Chalotez hag ar Breujoù un dalvoudegezh vras e-keñver studi an istor evit enaouiñ ar spered broadel e-touez ar re yaouank hag ar studierion. Danvez danevelloù istorel pe filmoù a bep seurt a gaver c'hoazh en afer-se a zo kalz pinvidikoc'h a zarvoudoù eget <sup>fantase, imagination</sup> faltazi ar skrivagnerion a \* gavo aze ur vengleuz prizius da <sup>analogue</sup> gorvoiñ. En hon amzer ivez e ren Breizhiz ur stourm damheñvel, dreist-holl gant ar strolladoù a ra ar muiañ a drouz evit ar mare e Breizh, hogen ret eo barn ar politikerezh-se ha

kompren perak o deus c'hwitet ar Vrezhoned e dibenn an  
18-vet kantved, dres evel ma c'hwitont er mare-mañ.

X

Sur-mat e vage Ar Chalotez ur garantez don  
evit e vro, ha dre studiañ kudennoù ar mererezh hag an  
armerzh e wele bennez pebezh reuz a rae doareoù-gouarn  
ar C'hallaoued. Hogen, awenet e oa gant spered ar fil-  
osofed c'hall a grede e oa talvoudus adkempenn ar gouarn-  
erezh e Paris evit mad Bro-C'hall. Da heul an dud-se  
e krede ivez ar Chalotez ha dre vras ar renkadoù uhel  
e Breizh e ve gwellaet un dra bennak er vro-mañ da heul  
kemmidigezh gouarnerezh ar C'hallaoued. Padal, ar c'hon-  
trol eo a c'hoarvezo, rak ar mennozioù evel an intrudu \*  
a zeuio a-benn ar fin eus Paris hag a roio an trec'h da  
dud an dispac'h gall. Stummidigezh meizel renerion Breizh  
a oa e galleg, ha divarrek int bet da verañ ar c'hudennoù  
don he doa ar vro da ziskoulmañ. N'int ket bet gouest da  
skouer da vuzuliañ d'ar c'houlz-se talvoudegezh ur yezh  
evel ar brezhoneg evit unvaniñ ar speredoù er vro ha  
diorren un uhelvennad nevez dieub diouzh ar preder estren.

Stourm ar Breujoù e Breizh a chome pell a-walc'h  
evelkent diouzh buhez pemdeziek ar renkadoù izelañ eus  
pobl Vreizh. Tud ar werin dre vras a chome diseblant a-  
walc'h peogwir ne gomprenent ket pegen stag e oa o int-  
erestoù ouzh re ar renkadoù uhel. A-hend-all e vezent  
miret pell d'ar c'houlz-se diouzh ar c'hudennoù politikel.  
Bremañ emañ kentoc'h ar c'hiz da reiñ da grediñ d'an dud  
e kemeront ur perzh bras er vuhez politikel, met ne oa  
ket kont evel-se d'ar mare. Ne oa ket unvan ar Vrezhoned  
peogwir e oa ivez mennozioù an dispac'h gall oc'h ober  
dija o reuz e-touez ar vourc'hizion gallekaet dre hant-  
erouriezh ar c'hambrou-lenn da skouer ha kazetennoù a bep  
neuz met hogos holl awenet ivez gant ar preder gall.



Met ret eo mont pelloc'h : Al lezennourion e  
 Breizh a glaske mirout <sup>clausules</sup> divizoù Feur-Emglev 1532 daoust  
 da enebiezh <sup>fonctionnaires</sup> kargidi ar Roue <sup>inclure, porte</sup> tuet a-bell zo d'e sellout  
 evel ur skrid didalvoudekaet. Pa soñjer mat ez eo diboañ <sup>insense</sup>  
 klask reiñ d'an emglev-se muioc'h a dalvoudegezh eget  
 na roe dezhañ ar C'hallaoued o-unan, peogwir eo war <sup>pression, nst</sup> atiz  
 ar re-mañ e oa bet sinet goude holl. Peogwir o deus atav  
 ar C'hallaoued <sup>voies</sup> dianavezet ar Feur-Emglev-se o doa ar  
 Vrezhoned <sup>d'occuper</sup> da blediñ raktal gant ur gouzor politikel all  
 evit o bro. Ne dleent e nep keñver chom hep <sup>responsabilité</sup> intrudu dirak \*  
 tonkad Breizh. Hogen kement-se n'eo ket bet meizet gant  
 Ar Chalotez hag e genseurtesed ha n'o deus morse kredet  
 lakaat en arvar beli ar Roue war o bro. Marteze e oa  
 diaes d'ar mare-se, met dlead kentañ Breizh a zo <sup>mener à bien</sup> seveniñ  
 he zonkad, plijet pe get da Vro-C'hall. Evit-se e oa ret  
 krediñ he doa Breizh un dazont bennak. Evit kalz tud e  
 oa Breizh ur vleunienn gaer degaset eus an amzer dremen-  
 et, ur broviñs a binvidikae kurunenn Vro-C'hall, met  
 tamm ebet un unded broadel da ziorren gant Bro-C'hall  
<sup>probablement</sup> a-hervez pe hepti diouzh ret. O vezañ ma n'o doa ket  
 Ar Chalotez hag e genstourmerion <sup>regardier lièrement</sup> dremmet ouzh an degouezh <sup>le cas</sup>  
 ar gwashañ ma vefe ret da Vreizh en em zibab ha diogeliñ <sup>garantir, nst</sup>  
 he dazont hep skoazell ar C'hallaoued, ez int chomet  
<sup>mauvaise crise</sup> divvennoz dirak gwallenkadenn o bro.

Setu perak evit <sup>aboutir</sup> disoc'hañ d'an trec'h e prient  
 bremañ an emsav ur gelennadurezh politikel <sup>complete</sup> klok gouest  
 da sammañ holl gudennoù ar vro hag enkadennoù an holl  
 renkadoù eus ar gevredigezh vrezhon.

(TRADITION)

HENGOUN HON EMSAV

Embann a reomp amañ un <sup>passage</sup> arroud eus levr Roparz HEMON Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh, deuet er maez e 1931. Tennet eo dicuzh ar pennad anvet A-enep d'ar gellenadurezh diyvezhek.

Ar brezhoneg evidomp eo ar frankiz; ar galleg ar sklaverezh. Petra a ra dimp bezañ gouiziek ma ne c'hellomp ket bezañ dishual ? Bez' ez eo Breizh ur <sup>nationale</sup> vroadelezh ! Neuze ne c'hell ket kaout div yezh. Pobl ebet n'he devo biken. Etre ar brezhoneg hag ar galleg ez eo ret dibab. Ar brezhoneg a zibabimp, pe ne vimp nemet bugale, ha gwashoc'h, tud digalon. Ha ma tibabomp hor yezh n'eo ket dre m'eo "yezh hon tadoù", nag "hor yezh muiañ karet", na "yezh ar galon", nag an holl draoù goullo a vezer boas da glevout gant tud na ouzont ober netra hep goulenn digarez...

Evidomp-ni ra vo gwasket <sup>impliment</sup> ha sanket en hor penn ar wirionez-mañ : lazomp ar galleg pe ar galleg hol lazho. Pep unan ac'hanomp a fell dezhañ harpañ ar brezhoneg. Ra falvezo <sup>il faudrait</sup> da bep unan ac'hanomp dizeskiñ ar galleg, stourm outañ e pep lec'h hag e pep amzer, stourm evit ur Vreizh vreizhat penn-kil-ha-troad ha n'eo ket hanter c'hall. Pet ac'hanomp a gredo ober ar c'hanm-<sup>has</sup> ed nevez-se ha lakaat ar re all d'e ober.

## NOTENNOU ARMERZHEL

Unan eus tachennoù ar politikerezh eo an armerzh. Studi an armerzh avat zo ur studi skiantel, ur <sup>scientifique</sup> quezoniezh; ne c'heller ket kregiñ ganti hep bezañ displeget an termenoù diazez anezhi, da lavarout eo ar <sup>concept</sup> meiz-adoù a dalvez dezhi da <sup>rele</sup> vinvioù-labour.

Da gentañ an termen armerzh e-unan. An armerzh zo kement a c'hoarvez gant ar madoù, madoù an dud, madoù ar broioù, an <sup>leuznaisanoù</sup> diwanañ anezho, an <sup>leuznaisanoù</sup> ober ganto, o distruj, an darempredoù skoulmet drezo etre an dud, h.a.

Kemeromp ar gwinizh da skouer. Ar gwinizh a vez hadet, eostet, dornet gant al labourerion-douar. An holl oberioù-se a renker dindan an anv : ar c'henderc'h; kenderc'h ar gwinizh, kenderc'hañ gwinizh; un atant kenderc'her gwinizh; Kanada zo unan eus brasañ kenderc'h-erion gwinizh ar bed; kenderc'had Kanada zo bet 15 milion t e 1963. En hevelep doare e komzer eus kenderc'h ar glaou, kenderc'h ar c'hirri-tan, kenderc'h an tredan, h.a.

Ar madoù kenderc'het a vez lakaet da dalvezout. Reoù'zo ne c'hellont talvezout nemet dre vezañ distrujet, ar boued da skouer : o beveziñ a reer. An distrujadur-se a reer ar bevezerezh anezhañ. Bevezerion ar gwinizh eo an dud a zebr bara ha kement boued tennet eus an ed-se.

Diouzh ar <sup>aux regards</sup> c'heñverioù a zo etrezo hag ar c'henderc'hañ hag ar beveziñ, e ranner ar madoù e madoù-kenderc'hañ, da skouer an douar ma vez gounezet ar gwinizh, ar greanti (1) ma vez kenderc'het an tredan, hag e madoù-beveziñ, evel ar gwinizh, an tredan; komz a reer ivez eus madoù-aveiñ, eleze an'ardivinkoù, an aozadurioù a zeu

*leins de mise en valeur  
et de cheminement*



da glokaat ar madoù-kenderc'hañ (an ijinennoù labour-  
druar da skouer). pe ar madoù beveziñ (al linennoù-  
tredan).

Un tremen a zo eus ar c'henderc'hañ d'ar bev-  
eziñ. Ar gwinizh ne vezont ket bevezet war al lec'h m'o  
c'henderc'her na gant ar re o c'henderc'h. An tremen-se,  
eus daouarn ar genderc'herion da zacuarn ar vevezerion,  
\* a reer anezhañ dasparzhañ ar madoù. Dasparzh ar madoù  
a gomprenet gant daou ster : a) an tremen anezho eus tud  
'zo da dud all, an dud-se o vezañ kenderc'herion, bevez-  
*intermédiaires* erion pe *entremetteurs* hantererion etre an daou rumm-se, pe c'hoazh  
perc'henned pe get war ar madoù; b) an doare m'emañ rann-  
et ar madoù en ur mare roet, al lec'hioù ma'emañ, an  
dud m'emañ en o c'herz, h.a. Ar ster a gemeromp amañ  
eo ar ster a), a verk un ober (ha n'eo ket ur stad evel  
ar ster b).

E-ser an dasparzhañ-madoù e vez renet eskemmoù.  
*cultivateur* Ar gounideg a werzh e winizh. Ar vestrez-ti a bren bara.  
Etre an daou ez eus tremen. An tremen-se a c'heller gwel-  
out diouzh daou zoare : a) ar gwinizh a vez treuzfurmet  
e bleud da gentañ gant ar miliner, e bara goude-se gant  
ar *postage* pöber; b) ar gwinizh a vez prenet ha gwerzhet meur a  
weñ en ur vont eus an atant ma vezont eostet d'an ti ma  
vez debret ar bara. An doare-gwelout a) zo hini ar c'hal-  
\* vezerezh (2); an doare b) zo hini an armerzh. Ar maladur  
\* hag ar baraadur zo anezho (darvoudoù kalvezel) eus tremen  
ar gwinizh; ar gwerzhañ hag ar prenañ zo anezho darvoudoù  
armerzhel o zremen eus ar c'henderc'her d'ar bevezer. An  
eskemmoù prenañ-gwerzhañ a reer anezho ar c'henwerzh.  
*commerce* Komz a reer eus kenwerzh ar gwinizh; komz a reer ivez  
eus kenwerzh-diabarzh ha kenwerzh-diavaez ur vro, hervez  
ma seller ouzh an eskemmoù graet gant tud pe kevredadoù  
ar vro se etrezo , pe etre kevredadoù ar vro-se ha

kevredadoù ar broioù all.

Emañ ar c'henwerzh e dalc'h daou ezhom : an ezhom-gwerzhañ (ur wech eostet e winizh, e rank ar gounideg o gwerzhañ), an ezhom-prenañ, pe, evel ma lavarer c'hoazh, ar c'hinnig hag ar goulenn. An daou ezhom-se, o c'hoari an eil a-dal d'egile, an eil war egile, a reer anezho an nevid. Komz a reer eus nevid ar gwinizh, nevid ar gloan, h.a. Komz a reer ivez eus nevid ur vro, eleze kement kinnig ha goulenn a zeu a-berzh kenderc'herion ha bevezerion ar vro-se.

An armerzh enta zo anezhañ kement a sell ouzh kenderc'hañ, dasparzhañ, beveziñ ar madoù. Evit reiñ un termenadur eeunoc'h : armerzh ur vro zo an doare ma tenn ar vro-se he mad eus he finvidigezhioù.

\* Science

Studi skiantel an armerzh, gouezoniezh an armerzh, a reer armerzhouriezh anezhi. An armerzhouriezh zo ur studi, hogen ivez un ober : ouzhpenn studiañ doareoù an armerzh evel m'emaint, e studi ivez an doareoù d'o gwellaat ha pleustriñ a ra d'o gwellaat war an dachenn.

An den a studi an armerzh, a ra war-dro armerzhouriezh, a reer un armerzhour anezhañ.

Pep gouezoniezh a studi <sup>cotei</sup> tuioù 'zo eus an traoù; da skouer, an armerzhouriezh a studi buhez an dud, ar broioù, en he c'heñver gant ar madoù, ar pinvidigezhioù. An <sup>cotei</sup> tuioù gwiriadus eus an traoù studiet a reer anezho devoudoù. Da skouer, kresk ar c'henderc'h tredan a c'haller gwiriañ en holl vroioù ar bed, zo un <sup>fait économique</sup> devoud armerzhel eus hon amzer; ar perzh bras en deus ar <sup>rol, part</sup> c'henwerzh en armerzh an Izelvroioù zo ivez un devoud

studiet gant an armerzhourion.

Er yezh voutin, <sup>impérial</sup> diresis, e vez graet gant un nebeut gerioù all evit menegiñ an armerzh : "espern-<sup>charge</sup>ouriezh", "arboellerezh", "ekonomiezh", h.a. Ar yezh resis, evel just, ne c'hell ket degemerout ar gerioù-se, da nebeutañ o reiñ dezho an hevelep ster. Arboellañ zo lakaat arc'hant, madoù, h.a., a-gostez e sell eus an dazoned. An arboelladoù eo ar pezh a lakaer a-gostez evel-se. An espern a vez graet ivez eus an arc'hant arboellet.

---

(1) Ti-kenderc'hañ ijinerezhel; gwelout pelloc'h an notennoù a-zivout ar greanterezh.

(2) Doare-ober, doare-labourat, ar re dreist-holl diaz-ezet war ur studi skiantel.

Liesskrivet gant ar gelaouenn



